

Redadeg 2022

Skolaj-Lise Diwan Gwened

Kan : 6vet klas

Gitar : Melaine Gautier hag Eflam Castrec (Lise)

Binioù bras : Ider Josso (3vet klas)

Ton ha pozioù kensavet get David ar Gall hag ar skolajidi-liseidi

**O na selaouit an ton hag ar son, ge
Dait buan da redek er Redadeg
Kanit a-vouezh uhel da vont ha da zont, ge
Paotred ha merc'hed evit ar brezhoneg !**

Dorn ha dorn dre hentoù treuz ha don
Eh imp da redek get holl an dud a galon
Mignoned e pep lec'h, mignoned kaer e-leizh
Da zañsal, da ganal dre holl e Breizh

Ret e vo deomp stourm c'hoazh, ret e vo huchal c'hoazh !
Evit ma vo klevet hor mouezhioù brav
Hor yezh a splannay c'hoazh, get gerioù nevez c'hoazh !
Hag e talc'hay hor stourm, hag hon emsav !

Merc'hed, paotred é redek e'it ho pro,
Savit ho penn, bemdez ha plijadur a vo !
Levenez e brezhoneg, kalon evit Breizh !
E Gwened 'huchimp kenavo d'ar vonreizh !

M' ho peus ket komprenet, e kanimp deoc'h da viken
An avel en ho plev, an evned eürus a-grenn
Daomp àr un dro 'tak an trec'h, bugale Breizh
Hag e kanimp arre, dañsomp asampl disamm !